

Rakskrid

Ganet eo bet Fanch Elies en Dre-Nevez e miz C’hwevrer 1896. A gWiklan e oa familh an tad, Yves-Marie Elies (1867-1926) [*Marvet ouzñ ar stern – Pirc’hirin kala-goañv*] hag a gWimilio hini ar vamm Catherine Le Gall (1867-1940). Pevar bugel a zo bet ganet : Jean-François-Marie [Fañch] (1896-1963), Guillaume (1898-1900) [da varv e vreur Gwilhomig eo gouestlet an danevell *Ar breur bihan – Pirc’hirin kala-goañv*, bet embannet evit ar wech kentañ e 1956 e niverenn 56 *Al Liamm*], Marie (1902-1956) ha Jean-Pierre ganet e 1904.

D’an 9 a viz Ebrel 1915 e oa bet galvet Fañch Elies da vont d’an Naoned davet ar 411^{vet} Rejimant Troaderien (411 RI). Reiñ a ra deomp da c’houzout e levrig soudard e oar neuial, lenn ha skrivañ, ez eo bihan an den (1m62), ront e zremm, eeun e fri, uhel e dal, liv kistin e vlev ha glas e zaoulagad. E ti e dud emañ o chom... e oa o chom ! D’an 19 a viz Gwengolo 1919 e vo disoudardet an troader kentañ-klas Elies en doa, a-hed ar brezel, nac’het bezañ gradeet peogwir ne felle ket dezhañ na kemer na kaout an disterañ kiriegezh el lazhadeg veur. Galvet e oa bet Yann Soudard ha Yann Soudard e chomo...

Triwec’h danevell a ya da ober an dastumad *Dremm an Ankou* bet embannet evit ar wech kentañ e Brest

gant *Skridoù Breizh*, e 1942. Ha moarvat eo war ginnig an embanner e oa bet dibabet dilezel an titl orin *Kontadennoù an drailh*. N'eo ket aes gouzout pehare eo bet skrivet an danevelloù pa oa bet embannet an danevell gentañ e-barzh niverenn 15 *Gwalarn (Ar banne gwîn)* e 1928. Hep mar en doa kroget gant e oberenn e miz Eost 1928 e Ploueskad, evel m'eo meneget e fin an dastumad. Ploueskad, ma oa genidik gwreg kentañ Elies, a oa bet e-pad pell lec'h vakañsiñ ar re Elies ha Sohier. En hañv-se e oa bet taget Fañch Elies gant ur barrad kleñved en e skevent, liammet gant an aezhennoù mougus en doa lonket e fin ar brezel, ha tu 'zo soñjal e oa bet broudet da sevel e "eñvorennoù" gant an aon da vervel trumm nes bezañ roet e desteni.

Kinnig a ra Abeozen e oberenn da « Eñvor an dud keiz / Kaset da Anaon / Eus o hunvreoù skubet / Eus o menozioù drailhet / Al levrig-mañ ». Hag ouzhpenniñ a ra : « Ne dint ket kontadennoù faltazius, ne dint ket kennebeut eñvorennoù nemetken. Diazezet int war darvoudoù bevet gant an oberour hag e geneiled ». A-drugarez d'an dielloù miret e kastell Vincennes (SHAT – *Service Historique des Armées de Terre*), da skridoù prevez ha da destenioù all ivez, omp deuet a-benn da wiriañ an darn vrasañ eus "an darvoudoù" a ra Abeozen meneg anezho en e zanevelloù. « Dindan pep anv e c'hellfe bezañ lakaet un anv gwirion, » a skriv Elies c'hoazh. Gwir, re wir : ar c'habiten Renaud, da skouer, a oa Grimaud e anv gwirion (lazhet e miz Eost 1917).

Frammet eo levr Elies en-dro d'un dudenn bennañ : Erwan. Heuliañ a reer anezhañ a-hed reuz ha freuz ar brezel hag an digarez eo kement danevell 'zo da zeskripañ deomp un darvoud bennak, spontus p'en em gav ar

soudard yaouank dirak ar marv (*Dremm an Ankou, Marv evit ar vro...*), drastus pa veneger poanioù ar soudarded bet kontammet ha taget o skevent gant ar gaz mougus (*Uperid*), frealzusoc'h pa guita an tachennoù emgann evit distreiñ d'ar gêr (*Permissionad*) pe c'hoazh pa ginnig ur banne gwin d'ur soudard alaman dihenchet e-kerzh un argadenn (*Ar banne gwin*). Un doare eeun en deus Elies da zezrevell darvoudoù pemdeziek ar brezel ha chom a ra uvel gant titloù an danevelloù zoken. Un dister titl e-giz *A-bed ar ganol* evit an danevell a gont deomp penaos en doa Erwan sikouret ha savetaet ur c'hamalad gloazet. Gwech ebet ne reas Elies meneg eus ar Groaz Vrezel a oa bet roet dezhañ evit an ober-se... « Ar soudard Elies Jean-Marie, klas 1916, marilh 1319 : soudard dispar. E-kerzh krogadoù miz Here 1918, hag eñ gant ur batrouilhenn 'oa bet gloazet he mestr etre al linennoù, e oa chomet gantañ betek gouloù-deiz da c'hortoz skoazell dindan tennoù mindrailherezioù an enebourien. Ha graet gantañ e seizh gwellañ evit degas ar gloaziad diouzh tu hon linennoù [*Le soldat Elies Jean-Marie, classe 1916, Matricule 1319 : excellent soldat. Au cours des combats d'octobre 1918, faisant partie d'une patrouille dont le chef était blessé entre les lignes, ne l'a pas quitté attendant jusqu'au jour et sous le feu des mitrailleuses ennemies l'arrivée des secours. A fait preuve d'une belle énergie en contribuant à ramener le blessé dans nos lignes.*], » a c'heller lenn en e levrig soudard.

Dibabet en deus Elies ober gant an trede gour evit danevelliñ kantreadennoù ar soudard Erwan a-dreuz tachennoù an Ankou evit daou abeg pennañ ha kenstag : da gentañ e fell dezhañ diskouez e chom neptu. Galvet eo bet da vont d'ober ur brezel n'eo ket e hini, ur brezel gant palioù displann, renet war an dachenn gant ofiserien

a ziskouezas buan a-walc’h bezañ ken didruez ha ma oant dic’houest – displegañ a ra deomp Jules Gros (hag Herrieu ivez...) ez eus kalz ofiserien hag is-ofiserien divarreket da lenn kartennoù an tachennoù emgann ! Da eil e fell da Elies en em zistagañ diouzh an eñvorennoù brezel bet skrivet betek-henn a lakae da harozed ar re a oa prest, gant un drantiz kañvus, da “vervel evit ar vro” (*Marv evit ar vro*).

Lennet en doa Elies, evel-just, skrid Jules Gros, *Dek devezh e Verdun*, intret gant laouenedigezh eeunek ar brezelour galvet da vont da Verdun, “ar gêr Sakr” : « Ha karout a rafes gwelet ar bed o vont mil vloaz war a-dreñv, ar Gaou o trec’hiñ war ar Gwir, ar Gasoni war ar Garantez, an Droug war ar Vad, an Diaoul war Doue ? Ne rafes ket, kuita ? Rak ma rafes, ne vefe ket a wad breton ez kwazhioù. Ac’hanta, kerzh d’an tan, neuze, ma faotr ha Doue d’az miro ».

Lennet ivez *Notennoù Brezel Ar Yeoded* (Boscher) gant e daolennadurioù bugelel hag e zaveoù diniver d’ar relijion : « N’am eus ket kousket ha n’eo ket souezhus. Ne oan ket lorc’hus ha n’ouzon ket pet gwech em eus kaset ma fedenn d’ar santezig karet Tereza ar Mabig Jezuz, am eus, evel ouzoc’h, karget eus ma difenn evit goulenn ganti skoazell ha difenn ».

Ha dizoloet ivez gouezder kevrinek testenioù Yann-Ber Kalloc’h : « Waraok, Kelt mat ! Ha tenn ha sko ! Kouezh mar kouezhez, ’vit ar vro eo ! Met sko, sko, sko ! O breur, sko ! Hep ehan, hep diskuizh, hep truez, tan dezhañ ! Lazh ha tag, p’en deo ret ! O breur, laz ! Bez ar freilh hag a val, ar garreg hag a flastr, ar gurun a freuz, ar mor a veuz : bez ar C’hadour. Dalc’h koun e oa da gourdadoù kaored divent a grene Germania dirak sell o

laga » (*Veni, Sancte Spiritu*)... Ne rae an tri-se, avat, nemet ezteurel ideologiezh pennañ o frantad. Elies, eñ, en doa c'hoant da ginnig ur sell all war ar brezel, sell ur soudard kentañ-klas kaset d'an drailh.

Hag arabat eo disoñjal e oa sevel ul lennegezh nevez unan eus palioù *Gwalarn* ma kaver sinadur Abeozen er gelaouenn nevez-krouet evel troour ar Mabinogion. Diaes e oa da unan eus krouerien ar gelaouenn chom hep klask ober un oberenn lennegel gant e eñvorennoù brezel ! Koulskoude, meur a wech en doa Abeozen disklêriet e oa diaes dezhañ skrivañ : « Ne red ket e-giz an dour er stêr, » a ouie lavarout. Ijin ha faltazi eo moarvat ar pezh a rae diouer dezhañ e-giz da galz a skrivagnerien bet stummet er c'hloerdioù ! Ober a ra gant ur frazennadur strizh, ur stil diglink, ur stumm eeun, en abeg d'an danvez (ne voueter ket hunvreoù kaer gant ar brezelioù...) hag en abeg d'e stummadur klasel, ivez.

« Setu an abardaez o louediñ. Chourikerezh kirri, c'hwirnadeg kezeg er vourc'h a-dreñv o c'hein. Ar bitailh eo oc'h erruout. Dont a ra betek ar pont dismantret er prad, tost ac'hane, hag Erwan gant ar c'haporal, ar bidonioù en e gerc'henn, a zilamm war-du eno. Bara, gwin ha lizhiri : c'hwek eo d'un den pep unan eus an traoù-se pa vez diouer anezho un dervezh bennak. Chaok ha c'hoarzh a zo en-dro d'ar c'hirri. » (*Marv evit ar vro*)

Koulskoude, daoust d'ar c'hoant d'en em zistagañ, da gaout un asez sell a-ziavaez war al lazhadegoù pem-deziek, e oar Elies silañ kalonadoù from en e skrid, evel pa gemenner da Erwan emañ e rejimant o vont da Verdun :

« Hag ez eo koulskoude ken c'hwek ar vuhez dindan hinon kelig an hañv : glasvez dre holl. Ar wazhig-dour, er

prad e-kichen, a richan war ar bili, skedus evel daoulagad merc'hed yaouank en o bleñv, an hevelep kanaouenn hag al laboused en halegoù. N'eus nemet keloù a garantez gant an douar strujus o tougen promesa an trevadoù da zont, ha ne ra forzh an natur ouzh ar boud kañvaouus a glever diouzh tu an hanternoz pa zeu an avel en hent-se. » (*Kelig an haññ*)

Ar marv eo, muioc'h evit ar brezel, tem pennañ an dastumad danevelloù. Naontek vloaz eo Elies p'en em gav e-kreizik-kreiz ar brezel hag emañ o paouez tremen un eizh bloaz bennak sparlet en ur c'hloerdi. D'ar studi evit mont da veleg eo bet gouestlet e vloavezhioù krennard hag an anaouedegezh en deus eus ar vuhez n'eo ket par da hini e gensoudarded. Relijiel eo e zoare da veizañ ar marv : n'eo ket tamm ebet par d'ar pezh a zo bet kelennet dezhañ er c'hloerdi ar gwirvoud a wel war an tachennoù brezel : « Saouzanet-holl e sell Erwan ouzh an dremm mastaret-se, dremm an Ankou. N'eo ket heñvel ouzh ar penn digig a weler dezhañ war ar skeudennoù hag e karnelioù e vro, ar penn gwenn ha naet ma spurmante ar barzh, en e boullou lagad goullo, selloù doueel ar C'hrist ; ar penn eo a zo bet graet dezhañ gant fallagriezh gouiziek Mab-den sevenaet, ur penn saotret, kalkennet, displeberet, pladet, ur penn euzhus evel kavadennoù diaoulek ar brezel. » (*Dremm an Ankou*)

Adal e gejadenn gentañ gant ar marv gwirion e vo sorc'hennet Elies gant an Ankou. Dre an teut e sko an Ankou hag e samm d'e heul buhezioù tud ne ouiont gour c'hoazh diwar-benn traoù ar vuhez. N'emañ ket Elies er brezel evit difenn ar C'hornôg, evit stourm ouzh ar varbared, evit dougen bri d'e Rejimant pe c'hoazh evit trec'h ar Sevenadur pe ar Gwir... Aze emañ evit ober

e “labour soudard”, ha buan e veiz eo ret dezhañ, da gantañ, stourm evit chom bev pa verzh n'en deus ket tañvaet c'hoazh plijadurioù ar vuhez.

« Fellout a ra dezhañ, kent mervel, mard eo ret dezhañ ivez bezañ dispennet war vaez ar stourm evit e “vro”, tañva dousder dianav pokoù madelezhur ur plac'h eeun he c'halon evel e hini, tremen un endervezh, en un hañv ken kaer, marteze hañvezh diwezhañ e vuhez, gourvezet el leton, en ur c'hornig goudor etre divrec'h kuñv unan a lavarfe dezhañ komzoù flour evel ma lârer aba ma 'z eus tud war an douar. » (*Kelig an hañv*)

Ha bihan-ha-bihan emañ o vont da goll kred en deskadurezh relijiel a oa bet e hini ha war grennañ ar mennozh da velegiñ.

« Re uhel evitañ pal ar santelezh kinniget d'ar venec'h. Ned eo-eñ nemet ur paourkaezh bugel dinerzhet, stag ouzh karantez ar bed-mañ, ha pa ve, evel bremañ, gourvezet e-giz ur c'horf marv war an douar kras, e lienenn delt sachet war e zremm. [...] N'eus e gwirionez anezhañ nemet ur tamm peñse kollet war vor an digenvez. » (*War lein ar run*)

Ma tilez ar relijion hag ar velegiezh e chom bev ennañ unan eus diazezoù an denelezh : karantez an nesañ. Karout a ra an nesañ evel an-unan, ha diskouez a ra un doare doujañs evit “an enebourien war a lavar o blenierien” pa ginnig ur banne da evañ d'ur prizoniad alaman. Hag Elies ha resisaat : « An neb a roio ul lommig dour d'ur paour em anv... Lennet o deus ar c'homzoù-se en tu bennak o-daou en o yezhoù disheñvel, en amzer ma tarempredent ar c'hatekiz. » (*Ar banne gwin*)

N'en deus ket ar brezel diskaret e feiz, avat. Hogen, emañ bremañ e feiz e Mab-den, er vuhez wirion. Krediñ a

ra er peoc'h. Ha dreist-holl, ar brezel eo en deus heñchet anezhañ etrezek an tu-kleiz pellañ : « E-pad kantvedoù ha kantvedoù hon eus pedet. Lavar din : n'hon eus ket gortozet hir a-walc'h ? Pet mil vloaz e vo ret eta gortoz ma vo sevenet an Aviel gant ar gristenien binvidik koulz ha gant ar re baour ? Tremen poent oa troc'hañ berr d'ar pedennoù aner ha stagañ gant hon daouarn-ni da sevel ar bed eeun n'en deus ket bleuniet dindan daeroù ar beorien, hon tadoù, abaoe daou vil vloaz, koulz lâret, a gristeniezh. [...] Ne fazie ket. Ur paotr bennak, eus Siberia pe eus Moskow, a oa o c'hoari kanenn veur peorien ar bed holl : War sav Tud Daonet An Douar... » (*E peoc'h an hañv*).

Ar preder war ar marv hag ar wirionded eo ar pezh a laka *Dremm an Ankou* da vezañ un oberenn disheñvel-krenn (war-bouez *Kammdro an Ankou*) diouzh an testenioù all bet savet e brezhoneg diwar-benn ar Brezel Bras. Ouzhpenn menno ha reiz personel Elies, bez e c'heller ivez displegañ ar sell distag a ginnig gant an amzer aet hebiou etre fin ar brezel hag ar mare ma stag da skrivañ. Graet en deus an amzer e dro, hag aet da get ar santimantoù feuls, an trivliadoù brezelek. A-raok ma savo keloù brezel adarre. Un istor all, evit Elies ivez...

Gwendal DENEZ

Ur ger a-raok

Ar marvailhoù-mañ, nemet II, XIII, XVII, XVIII, a zo bet embannet gant ar gelaouenn *Gwalarn*, war-dro 1928 hag er bloavezhioù da c'houde. N'eus nemet nebeut a draoù kemmet enno evit ar mouladur-mañ.

Ned int ket kontadennoù faltazius, ned int ket ken-nebeut eñvorennoù nemetken. Diazezet int war darvoudoù, bevet gant an oberour hag e geneiled. Dindan pep anv, e c'hellfe bezañ lakaet un anv gwirion. Lod ar faltazi a zo brasoc'h e XVII, XVIII. Aes e vo d'a lennerien merzout perak.

Dremm an Ankou

« Erwan, » eme ur vouezh drant e toull heoliet ar c’hev,
« da vurev ar c’homandant ez an. Ha dont a rez ganin
d’ober anaoudegezh gant hor rannad foziou-difenn ? »

Erwan a zeu er-maez, e zorn ur pennadig war e
zaoulagad trellet. Livier, reder all ar gompagnunezh, un
duard krenn eus ar c’hlas pemzek a zo ouzh e c’hortoz,
seder e zaoulagad, war e ziweuz ruz-bev ur mousc’hoarzh
laouen evel hinon an nevez-amzer. Arm ebet gantañ. Ur
vazh hepken en e zorn : ouzh e gostez, boest glas ar maskl
enep aezenn-vougus. Hag en hent. Ar foziou-difenn o
kildroenniñ a zo tomm gant heol miz Ebrel o parañ war
ar c’hleiz skarnilet. Amañ hag ahont, azezet war bazenn-
dennañ ar foz, soudarded a-vodadoù, lod o c’hoari ar
c’hartoù, lod all o fennoù savet war-du chapeledad gwenn
an oabl glas kalzennoù begek obuzioù ur c’harr-dredan
kanolier o klask tizhout un nijerez alaman, gwennilienn
velen e don an neñv.

Na trouz, na preder. Al linenn gentañ a zo ahont en
tu all da lein an dorgenn louet. A vare da vare un taol
kanol 75, trumm evel harzhadenn ur c’hi feulzet ma skrij
Erwan bep gwech, divoas evel m’eo. Ha setu holl.

*

* *